

En eñvor euz Marharit Fulup.

; Fête commémorative à Pluzunet, le Samedi 10 Septembre 1910 ; bet embannet e 1910.
Pennadou e galleg hag e brezoneg a zo e-barz al leorig-mañ. Ne vo adskrivet nemed ar re e brezoneg.

Modernnaet eo bet an doare skriva.

Taolenn

Maronad : Anatol ar Braz.

Allocution de M. Vallée.

Prezegenn Taldir.

Luskellerez evid Marc'harit (An Itron Durocher¹)

En eñvor euz Marc'harit. Erwan Berthou (Kaledvoulc'h)

Pa gane Marc'harit (Ar Moal ; Dir-na-Dor) (*e ano skrivagner, e gwirionez : Dir na dorr*)

Ar ganerez koz (Nicol) (Marteze : Nicol Emile. Plouared 1866 – Kallag 1939)

Bez Marc'harit Fulup (DOUARON (Penhouarn) (Plounevez-Kintin 1854 – Ar Hoz-Varhad 1924)

Prezegenn an Abad Clerc (Kloarek ar Wern) (Lanrodeg 1861 – Sant-Brieg 1944)

¹ An Itron Durocher : Lambaol-Plouarzel 1879 – Pariz 1942.

Maronad

Eun amzer 'zo bet, n'eus ket pell,
Pa raje heol, glao, pe avel,
'Vije² dre hentchou Breiz-Izel,
Da gad³ amañ, da gad du-hont,
Eur vaouezig o vond, o vond.

Eur vaouez paour, eur vaouez striz,
Soñj hoh-eus anezi, Plunediz,
Gand he fas gweñvet, he bleo griz,
Hag hi treud evel eun askorn,
Hanter voñs unan he daou dorn.

*

Ganet e oa pelerinez,
Gand ar re 'vid peseurt arwez.
'Oa mad pep sant ha pep santez.
An oll sentezed, an oll zent
A oa dezi he nesañ kerent.

He micher a oa mond bemde'
Da di eur sant pe egile,
En draonienn pe war ar mene' ;
Hag arri mad, kredet hardi,
Pa vije 'r sant e-barz 'n e di.

Dre ma tostae d'ar chapel,
Eur vured ganti 'n he godell
Evdil lakaad an dour santel,
Ar zantez koad pe ar sant min⁴
A gomañsae da vousec'hoarzin.

Da gad ar gêr, pa retorne,
Bet ganti pezh a houlenne,
Ar belerinez a gane
Ken ma lare tud ar mêziou :
« Homañ 'h e sur mamm ar gwerziou. »

Ya, an oll gwerziou a ouie,
Ar re gwechall, ar re hirie,
Hag ar re drist, hag ar re gê,
Desket ganti, piou a oar penaoz,
O tarempredi ar zent koz.

Skriva na lenn ne ouie ket,

² Vije : veze.

³ gad : da gavoud.

⁴ min : mên.

Ha biskoaz skol n'he-devoa bet,
Nemed en hent, skol an evned,
He skiant a oa 'n he memor,
Eur memor ken don hag ar mor.

Mamm ar gwerziou, te 'zo tavet ;
Er bed-mañ ne vi ken klevet,
Med da ano 'vo benniget,
O ! Marc'harid, keid ma sono
Ar brezoneg en on geno'.

Nim hen tou oll dirag ar bez
'N-eus savet dit on harantez.
Da ene 'zo 'mesk an êle'
O teski de⁵ a-vouez uhel
Pegen kaer eo lan Breiz-Izel.

Anatol AR BRAZ.

⁵ de : deze.

Allocution de M. Vallée

Dre skwer Marac'hrit Fulup, enoret hirio goude he maro gand kemend a dud vrudet, desket ho-peus eun teñzor e-barz ar brezoneg. Kaerra tra a hallfeh eta da vired en ho yez koz.

(N'eus

netra

all)

Prezegenn Taldir

O ! Tud varo parrez Pluned, me 'grog dre ho salud gand respet ha doujañs, c'hwi ar re⁶ 'zo gourvezet da viken er vered-mañ. Pedi a ran ar Mestr Oll-Halloudeg da veza trugarezuz en ho keñver, ha soueti a ran e chomfe beo da viken ar soñj ahanoh e-touez ho kerent hag ho pugale vihan a rumm da rumm.

Pa vez red d'eun den komz en eur vered e sant e galon o krena bepred dirag braster teñval an Ankou. Kêr ar re varo eo ar vered. Mar gallfem digeri ar beziou-ze, koulz an tammou tosennou pri heb ano ebed, emañ ar yeot o tiwan warne da ziskouez e kresk ar vuhez war ar maro, evel ar vein kaer war ar re⁷ a zo kizellet anioiu ha kaliteou tud a reñk vraz, mar gallfem gweled petra 'zo dindan ar bosou-ze, ma henvroiz ker, a-dra zur e vefe nebeud a lorch en on fenn, hag e soñjfem eun tammig muioh e gwander ar vuhez. Ar paour hag ar pinvidig a zo aze memez mod ; koulz an den desket, koulz an den dizesk, aze 'tigouez o flanedenn.

Ha koulskoude, ar horv, petra eo ? Netra. Ar spered, an ene eo toud. Eun den n'eo ket braz dre e gorv. A-benn kant vloaz, a-benn mil bloaz, ne vo ket dalhet soñj euz eun den en-devoa eur horv kaer, izili flour, nerz ha galloud en e zivreh, koantiri war e vizaj. Mez ho-pet soñj a-benn kant vloaz, a-benn mil bloaz, e vo komzet c'hoaz e-touez an dud desket demeuz eur gwaz hag en-devoa eun ijin braz, demeuz eur plah hag he-devoa eun ene kaer.

Piou ahanoh, piou en ho touez, laret din, paotred Pluned, en-dije soñjet biken e vije deut amañ eur wech bennag kemend a dud da renti enor d'eun tammig gwreg koz dister evel ma oa Marac'harit Fulup ?

Petra 'oa honnez evidoh, hag evid an darn vrasa euz an dud a dro-war-dro ? Eur plah koz a-feson, a-dra zur, mez na goude ? Eur baourez. N'he-doa, war ho meno, tamm danvez ebed, he horv a oa treud ha koazet, aliez e veze toull he mouchouer, hag he hoof a veze dalhmad lakaet a-dreuz, rag Marac'harit n'e' sur he-devoe milouerou.

Mez mar n'he-doa ket danvez diavêz war al lavar a ro ar bobl d'ar giz-se, he-doa danvez burzuduz en diabarz he fenn, e-barz he memor ; mar n'he-devoa ket a zillad fin, he-devoa eun ene gwerh ha fur an hini⁸ 'oa, hervez ar re o-deus tostaet outi, evel eul liorzig koant leun a vleuniou c'hwez-vad... hag ar bleuniou c'hwez-vad-ze a oa he *Hanouennou*.

Eur roue euz an Amzer Goz koz, ar roue David, a oa, war a gonter, eur roue gallouduz, hag a honeas eur bern viktoriou. Mez ar roue David, kaer en-deus bet ober burzudou brezel, n'eo ket deut e ano beteg deom abalamour da ze, deut eo davedom hepken abalamour e oa eur Haner euz an dibab, eur Haner dispar, hag hirie c'hoaz, ar Psalmou a ganer e-barz an ilizou a zo evid al lodenn vrasa greet gand ar roue kaner-ze.

Marac'harit Fulup, eviti da vezañ ganet paour ha marvet ken paour all, a zo bet ivez evid ar re a oar kompren an traou kuzet, eun spes Rouanez diwar ar Mêz. Bet eo evel pa lavarfen ar Skeudenn veo euz Breiz-Izel Goz, on bro.

En he Gwerziou, en he Soniou, kanet ganti war doniou ken brao ha ken koz, emañ ene Breiz o tridal ; gweled a reer, a-dreuz d'ar gwerziou-ze, kalon Vreiz a-barz an deun, evel ma weler, a-dreuz da zour eur feunteun, eur pezh arhant o lugerni tre er foñs.

Goud a ret pegen dleour eo bet sa Varc'harit ar barz brudet Fañch an Uhel euz Plouared, an hini⁹ en-deus klevet ganti eur bern soniou koz, a vije eet da goll anez da blah koz Pluned : abaoe, an Aotrounez vrudet Ar Braz, Vallée, Ar Moal, Even, a oa bet oll war-dro Marc'harit evid dastum tammouigoù euz an teñzor kaer a oa hi ar virouez fidel anezañ.

⁶ ar re : pere, er skrid orin.

⁷ ar re : pere, er skrid orin.

⁸ an hini : pehini, er skrid orin.

⁹ an hini pehini, er skrid orin.

Marc'harit ne vo biken ankouaet keid ma vo e-barz ar horn-douar-mañ eur Breton hag a ouio lenn brezoneg – ha me 'zoñj e vo 'hed an oll amzeriou Bretoned hag a ouio lenn o yez, n'e' ket 'ta ?

Bennoz d'an Itron Mosher¹⁰, eur Vreizadez euz an Amerik, a zo¹¹ bet gallet sevel arhant da brena eur bez da vired da viken relegou marvel Marc'harit Phulup.

He ene avad a zo pell-pell du-ze, er vro dudiuz leh ma lavarere a zo¹² joa ha levezuz peurbaduz. Me he gwel eno, hag hi azezet, hag en-dro dezi an Drouized koz, ar Zent, an Dud a Vrezel, an Dud a Labour, oh ober eur helh, hag o selaou an hini goz-kêz o kana ar zon-mañ a zeue ganti ken aliez :

*Pa vin maro hag interet
Pierig, 'mezi, ma mignon,
Pa vin maro hag interet
Laket ma bez 'kreiz ar vered,
Er pevar horn peder rozenn,
Pierig 'mezi, ma mignon,
Er pevar horn peder rozenn,
Diou a vo ruz ha diou 'vo gwenn.*

Ha me, neuze, en koun a heriou Marc'harit, am-eus degaset ganin euz a Gerne ar roz ruz hag ar roz gwenn a houl ar ganaouenn.

Setu int amañ !

Beza o-deus o lavar, ar bleun-ze ! Mar gallfent komz, i a lavarfe deoh evel-henn :

« Er Frañs hag en Breiz e tiwan dre-oll roz ruz ha roz gwenn. Mez ar roz ruz hag ar roz gwenn a oa brezel etreze abaoe pell 'zo, heb gonidegez ebed evite.

Koll a ree ar Roz ar pep gwella euz o amzer o tiframma o deliou kaer an eil digand eben, hag o tistruji, dre blijadur, o braventez ho-unan. »

Komprenet neb a garo. Mez ne gav ket deoh e hallfe ar roz ruz hag ar roz gwenn en em gleved, servijoud asamblez o bro, kaerraad anezi, ha dre o hwez delisiuz mesket, pellaad outi flêr ar gasoni hag an drougiez ?

Geo, ma henvroiz ker, ha se 'zo kirieg am-eus kemeret abeg en eur poz euz son Marc'harit evid senti ouz he c'hoant :

*Er pevar horn peder rozenn
Pierig, etc...
Er pevar horn peder rozenn
Diou a vo ruz ha diou 'vo gwenn.*

Mez ar zon ne echu ket reiz evel-se : lest ahanon 'ta da zevel eviti eur houblad diweza :

Kana raio an diou 'zo gwenn
Pierig, etc...
Kana 'raio an diou 'zo gwenn
Chomom *fidel* da dud on gouenn.

Hag an diou ruz a lavaro
Pierig, etc...

¹⁰ Itron Mosher : ganti e oa bet reñket an traou.

¹¹ a zo : ez eus

¹² a zo : ez eus

Hag an diou ruz a lavaro :
Kerzom *A-raog* bet' ar maro.

“TALDIR“ JAFFRENNOU.

Luskellerez evid Marc'harit

Marc'harit Phulup, te, gwechall
A yee dre an hentchou fall,

Deuz ar mintin beteg an noz,
En eur gana on gwerziou koz.

Te a gane er pardonioù
Hag e korn ar chiminalioù.

En eur gana on gwerziou koz
Deuz ar mintin beteg an noz.

Marc'harit Phulup, te, gwechall
A yee dre an hentchou fall...

Pegwir e-kuit out eet brema'
'Vid an hent braz, an diweza.

Stag out kousket dindan ar mên
Ouz an douar gand eur chadenn.

D'am zro me 'zeu ad Bluzuned,
Da gana dit, d'az luskellad.

Kousk e peoh, kousk en disheol,
Da virviken, kousk aze sioul !

War da vên, Marc'harit, beb deiz
'Kano eur filip, filip Breiz.

An INTRON DUROCHER

En eñvor euz Marc'harit.

O ! pebez souezuz planedenn
Ez eo bet da hini !
Marc'harit, bet out penn-da-benn
Er bed heb dihuni.

Da zaoulagad, ken frank digor,
A zelle er pellder
'Uz d'an douar hag 'uz d'ar mor
En tu all d'on amzer.

Diouz da gorv, maget a-boan,
E nije da spered,
Pell diouzim war mor-a-gan
An amzer dremenet.

Deskibien an Drouized wenn
N'o-doa frankoh eñvor :
En da hini e hellem lenn
Evel 'n eur levr digor.

Ha kement hini az kwelas
Ouz moger eur vered
Pe 'n eur hroaz-hent ouz troad ar groaz
'Kreiz ar Bobl dastumet.

O kana, diskuiz ha dalhmad,
N'ankouezo birviken
Sklêrijenn zakr da zaoulagad
Enne tan an Awen.

Daoust ha galloud 'heller kredi
N'oas ket kaset en-dro
Gand ar Re a zo en dudi
En tu all d'ar maro ?

Keltia a zo gortoz ar Bed,
E joa, e zalvourez,
Hag on Tadou 'ra ouz ar Red,
P'arru an dienez.

A evurusted ar Gwened
E tiskenn en on hreiz
Sperejou mad ar Re-halvet
Da zerhel bepred Breiz.

Paneved dit, mêziadez,
A dremenas hep skol,
Kaerra lodenn euz on herez

A vije eet da goll !

Keid ma vezo komzet on yez,
Keid ma vezo kanet,
Keid ma vezo anaoudegez
Evid ar wir Varzed,

Paourez Pluned, te 'vevo c'hoaz
En despet d'ar maro,
Etre An Uhel hag Ar Braz,
En eñvor tud da vro !

*

Dirag Helori hag Alan,
Dirag Nevenoe,
Dirag Lez-Breiz, dirag Gwiklan
Ha dirag Gwenole,

Dirag ar Varzed hag ar Zent,
A zo el levenez,
Te 'gan bremañ, 'vel diagent
E-barz ar haerra Lez.

En lez gwenveduz Keltia,
E-kreiz an Drouized fur,
Fañch An Uhel 'ra dit kana
Dirag e Vestr Arzur.

Erwan Berthou (Kaledvoulc'h)
21 Eost 1910.

Pa gane Marc'harit (Ar Moal ; Dir-na-Dor)

D'an Itron Mosher gand doujañs.

'Daleg he yaouankiz, eru vouez he-doa klevet
Hag a lavare dezi : Kan, o ! merhig Pluned,
Kan d'ar paour, d'ar pinvig, ha kan da-unan-penn,
Kan en ti hag er-mêz ha kan en pep tachenn.

Klevet he-doa ar vouez a lar d'an alhweder
Sevel da houlou deiz e-kreiz al lanneier,
Pignal a-denn-askell bedteg bolz ar stered
Da ginnig da Zoue son al lann alaouret.

E-pad tri-ugent vloaz, Marc'harit, heb dihan,
A vrudas dre Arvor nerz dudiuz ar han,
Ar han strinket gwechall beo euz kalon ar barz
Dre vouez sklêr Marc'harit a zalhas d'ober marz.

'N heh eñvor, 'vel eun arh don hag alhwezet kloz
E oa dastumet teñzoriou on yez koz,
Ma oe gwelet eur plah dizesk hag ezommeg
O tizarbenn dre Vreiz kernez ar brezoneg.

-Tud karget a vadou, an arh du-ze 'zo bar,
Ha koulskoude, me 'm-eus, ha n'ho-peus ket e bar.
Eur bara, Bara Breiz miret gand ar Varzed,
Hennez 'zalh tomm ar gwad en kalon ar gwazed.

Ha kerkent he hlevjed, gand eur zon, o kinnig
Eun aluzenn dispar d'ar paour-kêz pinvidig,
Ha, gand he zeñzoriou, da viken dibourvez,
O vond, renet bepred gand dorn ar Baourentez.

Dudi 'oa he haved 'toull he dor, heh-unan,
Ar werzid ouz he dorn troet gand rod ar han,
O lida buhez Vreiz ha vertuziou he zud
Ha Breiz o tihuni d'he mouez, 'vel dre vurzud.

Klevet 'veze neuze dre 'n êr trouz an armou,
Mouez flour ar verjelenn gand he saout er parkou.
Galvou têr ar Varzed, huanadou ar Zant,
Son ar hleier arhant o tintal er gouent.

Klevet 'veze gwechall, pedenn ar hantikou,
En-dro d'ar hroaziou-mên, en-dro d'ar chapeliou,
Mouez seder ar biniou e-kreiz an abadenn,
Ha troad skañv ar horoll o tripal en dachenn.

Garm, pedenn ha dudi, brezel, kañv, ebatou,
Breiz a-bez, dre halloud ar han treh d'an Ankou,

‘Vel ar mor en e vleun war an aod o tarzañ,
Dre vouez flour Marc’harit a deue da ganañ.

Setu d’an alhweder trohet e ganaouenn ;
Eñ maro, ‘kreiz an erv, e-touez al lann melen ;
E-harz kroaz ar vered Marc’harit ‘zo kousket,
Mez ‘barz ar baradoz heh ene ‘gan bepred.

AR MOAL (Dir-na-Dor)

Koadoud, gouel ar Werhez, 8 a viz Gwengolo 1910.

Ar Ganerez koz

Marc'harit Phulup deuz Pluned
'N em bro gwechall 'devoa kanet.
Asamblez gand ar Barz Luzel
War oll dachennou Breiz-Izel,
Dezañ 'kontas kalz a werziou
'Vez merket 'n e levriou.

Hirie dirag ar bez kaled
War an hini¹³ eo garanet
Da ano, paour-kêz Marc'harit
El leh ma kouskez doustadig
Ha c'hoaz eo skrivet warnezañ
Penoaz 'plije dit-te kanañ.

Deut a zo tud¹⁴ euz a bell-bro
Amañ da veuli da ano.
Beteg eun Amerikanez
'Vidout eo leun a vadelez,
Da vad e kar ar Vretoned
'Mañ 'n ez kichenn 'barz ar vered.

An aotrou Anatol ar Braz
Gand ar Goffig amañ 'deuas,
Aotrou Vallée a ZantBrieg,
Tud a zo meurbed talvoudeg.
Oll eh int deut d'az pro garet
'Vid goud peleh e oas kousket.

Marc'harit hag ar Barz Luzel
'Deus diskwellet a-raog mervel
Pegen kaer 'oa on gwerziou koz.
Da virviken dezi on bennoz,
C'hwi 'peus karet ar yez dispar
Tra ma oh bet war an douar.

Te 'poa kanet en Plouared
Soniou gand Luzel ken karet
Ha 'vel pa welet e skeudenn
Drezout 'redas eun domnderenn
Ma'z-poa laret a wir galon
'Oa heñvel-beo euz da vignon.

Meulom an itron vad Mosher
'Zo bet ken mad en az keñver,
An Aotrounez hag ar Varzed

¹³ an hini : war behini, er skrid orin.

¹⁴ Deut a zo tud : Deut ez eus tud

Dre-oll gante e vi meulet.
Gras deze ma vo dalhet er vro
Da werziou koz ha da zonio'.

Bremañ du-hont er hloar baduz
Moarvad te 'gano c'hoaz joauz.
Selaouet e vo, Marc'harit,
Da vouez skiltruz 'vel eun eostik
Pa gani d'he yez Breiz-Izel
E karfom oll beteg mervel.

NICOL

Bez Marc'harit Fulup

Ra vezo benniget da ano da viken
Marc'harit klaskerez ! Astennet eo da benn
War eun tamm bochad plouz, e gweled¹⁵ ar bez don,
Da gorr en-deus diskuiz 'vid diweza pardon !
Mez da ene dudiuz, e palez an Drinded,
E-touz an oll Êlez, ar Zent hag ar Varzed
Demeuz a Vreiz-Izel, dija a gan joauz !
E-bazr an Êzenn Zakr, kaniri an Delenn
Dre 'n Ollhalloudeg, a zao e zon skiltruz...
E leh al leor koz, kuzet en da varlenn
'Vid niveri, gwechall, da Werziou a vrezel
Da Zoniou a gane ar garantez fidel.
Dastumet en da benn, eun Êl gwenn e vantell
Stouet e dal ken drant, 'ginnig dit eur misel¹⁶,
Beteg an dremmwel pell euz ar Beurbadelez
Da vouez a vez klevet, o ! gwirra Breizadez !

AR BERR (Ab-Alor) (An Erge-Vihan 1874 – Roazon 1946)

¹⁵ gweled : bered.(Sur ez eus eur fazi : gwered).

¹⁶ misel galleg : missel.

Prezegenn an Abad Clerc (Kloarek ar Wern)

Ma zud vad,

Ar homzou ho-peus klevet beteg-henn diwar-benn Marc'harit Fulup n'o-deus lakaet dindan daoulagad ho spered nemed ar ganerez. Euz ar gristenez eo e fell din kaozeal ganeoh eur mareig.

Eur plah a feiz e oa Marc'harit, hag he feiz ne oa ket eur feiz klouar ha 'vel divlaz. He-unan e ree ganti heh oberou. Pedi dreist-oll a blije dezi, rag eur fiziañs dreist-muzul he-devoa en nerz eur bedenn galoneg.

Eviti he-unan e pede hag evid ar re all ivez. Nag a wech eo bet kaset da belerinañ amañ ha du-hont, gand tud ha n'o-doa ket amzer pa galloud da vond int o-unan da weled ar Werhez hag ar Zent en o iliz pe en o chapel. Labourad, siwaz ! n'helle ket dre ma oa nammet he daouarn. Med skañv e oa he zreid ha dre ze, evid eun nebeud gwenneien, en em garge, ha stad enni, d'ober beajou euz an hirrañ. Ha c'hoaz ne veze diviet he yalh a-benn ma veze distro d'ar gêr. E-leh paeañ gand arhant an degemer a veze greett dzi war he hent gand an dud vad, e kane deze – da vihannañ, mar ouient ar brezoneg – unan bennag euz he gwerziou pe euz he soniou : ken deread an digoll evid madoberourien ha ma oa ar gonid evite. Nebeud-nebeud koulskoude e honeas 'n eur ober he micher a belerinez : ne ouie ket espern.

Ha neuze, he halon ne oa ket evid en em stagañ ouz an arhant. An Aotrou Doue hag he bro Breiz-Izel, ar feiz hag ar brezoneg, ganto hepken e seblant e oa he harantez.

A-walh eo soñjal enni evid gweled pegen gwir eo ar geriou-mañ a lennet bep sul er penn kentañ euz *Kroaz ar Vretoned* : Ar brezoneg hag ar feiz

A zo breur ha c'hoar e Breiz.

Ra vo eta ar Vretonez vad-mañ, ra vo Marc'harit Fulup evuruz da viken gand an Aotrou Doue ha gand Sent koz on Bro garet !